

## KIS-684 – Gl. *foundation*

(GE – 24 06 00)

Ur *foundation* zo un ensavadur prevez a laz kevredin, anhelvus enta, gouestlet d'un obererezh skiantel, arzel, kravezel, karitezel, kedvuhezel pe yec'hedel, e berr : en arempred “mad an holl” e mod pe vod. Krouet e vez gant un pe lies preveziad o terannañ dezhañ an holl pe un darn eus o madoù. E-keñver gwir ez eo ar *foundations* disheñvel diouzh ar c'hevarzheoù (e Frañs emañ ar re-mañ e dalc'h Lezenn 1901) dre ma vezont amparet diwar-bouez an argouraoù. Disheñvel int dreist-holl diouzh an aozadurioù foran : e piaou int d'un dezvad anavezet gant ar galloud Stad (a vir ur gwir evezhiañ warno), nemet ez int organoù eus ar gevredigezh keodedel, distag mat diouzh ar gevredigezh politikel.

Kozh eo ar *foundations* en istor ar bed. Roudoù anezho a gaver en Egipt ar Faraoned. En Europa e tiwanjont er Grennamzer ha Saoz a voe ar riez kentañ o reiñ dezho un dezvad (*Statute of Charitable Uses*, 1601). Hiziv e niverer un 30 000 anezho er Stadoù Unanet m'o seller evel “*the oil of social progress*”. E Frañs — ma voent freuzet gant an Dispac'h evel ma voent berzet da c'houde er riezoù sokialour — e tenn o niver da greskiñ abaoe an eil Brezel bed hep mont neoazh en tu all da 300 ; ar re bouezusañ eo *Institut Pasteur* (1887), *Fondation Curie* (1921), *Maison de la chimie* (1928), *Orphelins Apprentis d'Auteuil* (1929), *Centre international de l'enfance* (1949), *Cité internationale des arts* (1957), *Fondation pour la recherche médicale française* (1965), *Fondation Le Corbusier* (1968), *Fondation de France* (1969) a zo bodet enni 170 *foundations* all, *Fondation du Trois-Mâts Belem* (1980), *Institut international du monde arabe* (1980), h.a.

Pe dermenoù brezhonek arverañ en dachenn dibarek-mañ ?

Ur c'hemeradur gwir kentañ zo da Gl. *foundation* : "derannadur padek madoù d'un obererezh a laz kevredin, aluzonus pe diemzant" <sup>1</sup> ; hag ur c'hemeradur deveret, strishoc'h : "tudelezh krouet war-benn seveniñ an kez obererezh<sup>‡</sup>. Ar c'heal diazez zo

---

<sup>1</sup> “Affectation permanente de biens à une œuvre d'intérêt général, charitable ou désintéressée.” *Lexique des termes juridiques*, Dalloz, 1974, p. 168 [merkomp e rafed e galleg kempred gant *caritatif* (karitezel) kentoc'h eget gant *charitable* ].

<sup>‡</sup> “Personne morale créée en vue de réaliser ce but.” *Id.*, *ibid.*

enta an “derannadur”, an dioueradur eus o madoù gant un pe lies prevezriad e gounid ar mad kevredin. Keal hemañ a adkaver dec'heriet gant unan eus ar c'hevatalioù saoznek : *endowment*<sup>2</sup> "argourouad". Mar gallfed adkavout seurt keal kennotet e doare pe zoare en termen brezhonek, ne ve nemet gwell evit e gevazasted. A-douez an elfennoù ouzh e zougen : *reiñ, profañ, dioueriñ, kediñ, gouzeuliñ, argourouañ*, e lezfen agostez an tri c'hentañ, re engwezhiet en arverioù pemdeziek nes. An tri all avat a c'haller arnodiñ da zanvez hon embreg :

Br. *kediñ* zo bezant endeo e hBr. *ced-* "donner" (DGVB 99) & Kb. *ced* "gift, boon, favour", *cedu* "to give" (GPC 445), hBr. *ho-cet* (C. Redon ch. 345) & Kb. *hyged* "bountiful, generous" (GPC 1964); e adkavout a reer e brezhoneg kempred an Armerzh : *argedad* "bonification, prime" (GEAK. 30, 185) hag ar Brederouriezh : *kediñ* "donner, conférer", *kediñ ster* "donation de sens, Sinngebung" (La-12 417).

Br. *gouzeuliñ*, keveleb Kb. *gwaddoli* "to endow, divide, give" (GPC 1544), Br. *gouzeul*, "gift" [bet meneget hep dave er stumm krBr. *gudul* gant LOTH in *RC* 38 170], keveleb Kb. *gwaddol* "endowment" (ennañ da stirann *dawl* "rhan, cyfran, anrheg, rhodd", GPC 906), zo bet korvoet e brezhoneg kempred an Armerzh : *gouzeul, gouzeulad* "prestation, allocation" (GEAK. 183, 247), endra gaver e yezh ar Vezekniezh un deverad all diwar ar stirann *-deul-* a zo *dizeul* "clairance" (La-09 217).

Br. *argourouañ* zo stumm kempred krBr. *argourouaff* (C.) "doter", deveret diwar krBr. & Br. *argourou* "dot", keveleb da Kb. *argyfrau* "personal property of wife, endowment".

Da gendec'heriañ Gl. *foundation* en e gemeradur kentañ, eleze "derannadur padek madoù", "endowment", e terefe **gouzeul g.-ioù**. En eil kemeradur emañ ouzhpenn ar "c'hrouiñ tudelezh", eleze an "diazazañ ensavadur (war-benn degemer *gouzeulioù* an donezonerion pe al laeserion)". Aze e kinnigfen loc'hañ diwar ar stirann *-ked-* a rakgerfen gant *bon-*, o tegouezhout gant **bonged g.-où**.

Evit amprouiñ an nevezc'herioù e klaskin treiñ arroudoù eus ar pennad FONDATIONS embannet en *Encyclopædia Universalis* :

*“Gant ur spered anhelvus hag eorizhek da gentañ e vez douget ar vongedourion, ha bezet o frepoz ar relijion pe an aluzon evel ma veze an dro gwechall dreist-höll (bongedoù deol : ilizoù, kouentoù, oferennoù, ospitioù...) pe, evel hiziv alies ouzh alies, ar vekeniezh pe*

---

<sup>2</sup> Sk. : *Duke Endowment* (USA). An anvadoù all zo *foundation* (*Rockefeller Foundation*, USA), *fund* (*Rockefeller Brothers Fund*, USA), *trust* (*Pilgrim Trust*, GB), *institution* (*Carnegie Institution*, Washington), *corporation* (*Carnegie Corporation*, New York), h.a.

*an dengarouriezh (krouiñ arzel pe imbourc'h skiantel ; madobererezh...).*

*“E-mesk seurt abegoù hael e teu a-wechoù re all nad int ket ken glan marteze, evito da vezañ enorus bras hag efedus. Da skouer, ha pa ve deol hag aluzonus ar bonged, e c'hoarvez d' ar bongedour tennañ lusked eus an damant d' e salver peurbadel pe da hini e dud. Gant ar bongedour dengar e c'hoari peurvuiañ ar c'hoant ma padfe e anv ha ma ve lidet e eñvor e-touez tud ar remziadoù da zont, un doare hennezh da ziogeliñ e dreuzvuhez. A-wechoù, er Stadoù Unanet da nebeutañ, e sav er bongedour ur meni morc'hed a-ser gant e c'hoant ober d' ar strollelezh (met n' eo ket d' ar Stad na d' ar c'hemederezh) emvataat eus e binvidigezh : e se daskoriñ d' ar gevredigezh madoù rastellet digoustiañs a-walc'h hag adc'hounit e vrud. Heñvel dra, perzhiañ a ra stalioù greantel ha kenwerzhel 'zo e savidigezh bongedoù dre ma intentont eno gant poell ur splet, un daranverezh pergen, a zo dezho pezh a oa ar c'hlod da Laorañs Medicis.”*

“Le mobile qui inspire principalement les fondateurs est de caractère non lucratif et idéaliste, qu'il s'agisse, comme c'était surtout le cas jadis, de religion ou de charité (fondations pieuses : églises, couvents, messes, hospices...) ou qu'il s'agisse, comme c'est de plus en plus fréquent aujourd'hui, de mécénat ou de philanthropie (création artistique ou recherche scientifique ; œuvres de bienfaisance...).

“À ces nobles motifs peuvent aussi, parfois, s'en mêler d'autres, moins purs peut-être, mais fort honorables et efficaces. C'est ainsi que, même quand il s'agit de fondations pieuses ou charitables, le souci du salut éternel du fondateur ou des siens peut jouer un rôle déterminant. Dans le cas des fondations philanthropiques, c'est généralement le souci de voir perpétuer son nom et célébrer sa mémoire parmi les hommes des générations à venir, ce qui est une manière d'assurer sa survie. Parfois, on a vu, aux États-Unis du moins, le désir de faire profiter la collectivité (mais non l'État ni le fisc) de sa fortune s'accompagner d'un certain repentir : restituer à la société des biens acquis sans grand scrupule et se refaire une bonne réputation. De même, des entreprises industrielles et commerciales participent à la création de fondations, par une vue bien comprise de leur propre intérêt, notamment publicitaire, lequel est aux firmes ce que la gloire était à Laurent de Médicis.” (Michel POMEY, in *Encycl. Univ.* 7, 1985, p. 1137a.)

“Dre zespizadur e rank loazioù ar bonged bezañ piaouel dezhañ. Amparet e vezont gant un argouraouad<sup>1</sup> derou e rezh kevala a vo diouzh an dro kresket da c'houde dre c'houzeulioù all roet gant an izili pe o tont eus an diavaez. Ent reol, e tle hevelep argouraouad bezañ kemmiret, ar c'horvoderioù hep mui diwarnañ o vezañ bevezadus. Evelkent, er Stadoù Unanet e vez bongedoù padennek ampart a-ziwar ur c'hevala da vezañ darnaouet dindan un taluad lavaret.”

“Les ressources des fondations doivent être, par définition, des ressources propres. Elles sont en général assurées par la constitution d'une dotation initiale en capital, laquelle dotation peut toujours être ultérieurement accrue par des apports supplémentaires ou extérieurs. Normalement, cette dotation doit être conservée, seuls les revenus pouvant en être consommés. Aux États-Unis, toutefois, il existe des fondations, de caractère temporaire, constituées à partir d'un capital à distribuer dans un délai donné.” (Id., *ibid.*, p. 1138c.)

---

<sup>1</sup> Gant rat e lezan amspis amañ ur c'hemm kemeradur bezus etre *argouraouad* ha *gouzeul* : an daou moarvat a glot gant Gl. *dotation*, nemet e vez mat bepred diawelout arverioù resisoc'h ha derc'hel d'ar loazioù yezhel en o amboaz.